

JEZUZ O TOUGEN E GROAZ

Pec'her, pec'her, digor da zaoulagad,
Ha sell aman, sell piz ouz ar pezh koat,
A dle war-n-an, hag 'vid-oud, da Zalver
Gouzanv hirie ar maro 'tre daou laer.

Jezuz barnet d'ar maro

Rag douget ê 'r varnedigez skrijuz :
Stag ouz ar groaz mervel a rank Jezuz,
Anez, an Nenv ouz-imp 'chomo zerret ;
Kalonou dir, ne vefet-hu frailhet ?

Jezuz sammet gand e groaz

Sethu Jezuz o kregi en e groaz,
Ponner meurbed, gant hon fec'hejou braz ;
Krena a ra e izili d'ean,
E-lec'h rei dorn, holl e skoont gant-an !

— « Bourevien kriz, 'skoet ket gant Jezuz !
Gwelet 'pe stad 'man e gorf truezuz ;
A c'houliau ho peuz e c'holoet,
Hag e benn sakr, a spern lemm, kurunet. »

« Sellet, sellêt ; nan ê mui nemed gwad :
Penôz, neuze, e tougfe 'seurt pezh koat ?
Ho pezet aon ne darsfe ar c'hurun
A-uz d'ho penn, d'ober ouz-oc'h bruzun ! »

— « Tad euz an Nê, Doue holl-c'halloudek,
Ho pet true euz ho Mab ezommek !
E vourevien, krisoc'h eged tigred,
War e gorf sakr, a sko, a sko kalet ! »

— « Elez an Nenv, diskennet d'an douar
Evit diskouez da Jezuz ho klac'har !
An den divad, kiriek euz e boaniou,
E-lec'h daelou, a ro d'Ezan taoliou ! »

Jezuz o kouean dindan ar bec'h

Jezuz a gouez, gwasket dindan e vec'h ;
Hanter-varo e welan e ziouvrec'h,
E zivesker (1) a deu da fazian
Hag e galon, siouaz ! a vank d'Ezan.

Jezuz oc'h en em gavout gand e vamm

— « Mari, Mari, c'houi, e vamm vinniget,
Ma oc'h euz c'hoant, eur wech c'hoaz, d'e
Hastet buhan ! 'Man o vont da vervel, [welet,
Dindan e groaz, 'kreiz eun anken marvel. »

« Mamm a c'hlac'har, tener ê ho kalon ;
Ouz e welet, e ranno, 'm euz aon !
Mar gellet, ia ! en hoc'h anken garo,
Komzet out-An, ha c'houi e gennerzo. »

— « Ma Mab, ma Mab, ha c'houi a zo aze ?
Piou 'ta en deuz ho laket er stad-ze ?
Siouaz ! ma Mab, c'houi santel ha dinam !
Ouz ho kwelet ma c'halon a ziframm. »

« Lavaret mad en devoa Simeon
E tliec'h-hu glac'hari ma c'halon,
Pebez anken ! Ma Mab, da vihana,
Gret d'in mervel e-harz ho treid ama. »



Simon a Sirena a ro dorn da Jezuz da
zougen e groaz

— « Pelec'h eman Simon a Sirena
'Vit ma tevio d'ho skoaiian, d'ho harpa ?
Simon, Simon digaset ho tiskoaz,
Evit dougen eur pennik euz ar groaz. »

« Eun dismeganz kavfet, me oar ervad,
Ha, koulskoude, 'vid-oc'h pebez eurvad !
Rag, goude-ze, eun de ho po enor,
Er Baradoz pa ho tigemeror. »

(1) E ziouhar.